



## CHANSON NEVEZ,

*Composet var sujet eur c'himiad etre daou zen  
yaouanq eus a escopti Treguer.*

*Var eun ton divertissant.*

---

### *Ar Goas.*

**B**ONJOUR d'êc'h, va Mestrez, deut oun c'hoas  
d'ho qu'ëlet ;  
Dioc'h ma leverot din, em rentot glac'haret :  
C'houi voar a bell-amzer peguement ho caràn ;  
Merqet e meus-én d'êc'h n'en d'ê qet a vremen.

Demeusur ch'ostez alloc'h eus sur va zromplet,  
Ma na deut oc'h-unan eun nebeut d'am c'haret ;  
Seblantout a rê din ne voac'h qet drouc-contant  
M'en em gavemp eun tu assambles o parlant.

Bet zo ganeomp hon daou alies preposiou,  
Testes vat oc'h anê, dalc'hit mat d'ho comzou,  
Me vo fidel d'am guer, dalc'hit mat d'oc'h hini ;  
An amzer a avanç, poent ê deomp dimezi.

Ho pizach, ho portret, ho teod, ho taou lagad,  
Ho furnes, ho touçder, ho comzou dereat,  
O deus grêt em speret qer bras impression,  
Mar deut d'am dilezel, e ranno va c'halon.

N'ouffen petra d'ober , ret eo clêvet bremâ  
 An arrêt definitif , va setanç diveza :  
 Güell eo mervel buan eguet bout languissant ,  
 Bepret en esperanç , bepret en nec'hamant.

Roit din , va Mestres , prontamant va arrêt ,  
 Ha sonjit qent e rêi emeus calz ho caret ;  
 Consultit ho calon , sònjit ne zeus hini  
 Ho car mui eguedòn , ha deut d'am c'honsoli.

*Ar plac'h.*

Donet d'ho consoli a c'houlet , va mignon.  
 Ezom a meus ive a gonsolation :  
 Ganêc'h e c'houlennàn ar c'hraç a c'houlennet,  
 Ezom hon eus hon daou da veza consolet.

Ho setanç a c'houlennit , plijet gant va Jesus  
 E tepante ouzìn e rêi dêc'h gracios !  
 Certen en ho pije en ho tiscrétion ,  
 Agreabl deomp hon daou en dezir hor c'halon .

Ma vijen me mestrez demeus va bolonte ,  
 Me voa dêc'h a choui din hep nep difficulte :  
 Me meus ho caret mat hac ho car a vremâ ,  
 Ranna ra va c'halon oc'h en em dispartia.

Mes qent dispartia , me ho pet , selaoet ,  
 Ha grit reflexion var va guer eur momet ,  
 Doue a c'hourc'hemen senti oc'h tad ha mam  
 Hac oboissa dê evit beza divlam.

Int a zalc'h n'or henver plaç an Autrou-Doue,  
 Oboissomp , p'on eus digante ar vue ;

Calz a boan o deus bet o tont d'hon elevi ,  
Ne qet just hep o graç -vad donet da zemezi.

O mouez zo evidomp certain mouez un Doue,  
Biqen netra ne ràn hep cavet o c'honje :  
Grêt e meus va fossubl evit o renta contant ,  
Grêt oc'h eus hoc'h ini , ha ne dint qet assant.

Me gred bremâ certain ne domp qet destinet  
Da veza priejou assambles unisset ;  
Doue ra deomp entent e vouez dre o guenou,  
Biqen ne dransgressàn sur e c'hourc'hemenou

Maraen hep oc'hraç-vadur marc'hat qer padus,  
Em bez aon goude-ze na ven me maleürus ;  
Va c'houstianç goude a rebeche din-me  
Em be ho qemeret hep conje va ligne.

Comzet meus ha grêt comzen hor faveur oute,  
Ha biscoas neus gallet o zrei var an tu-ze ;  
Credit en assurancç oun-me qer bras fachet  
Ha ma ouffac'h beza , pa ne dint distroet.

Qement a meus grêt tout a zo bet inutil ,  
Demezi hep o c'honge n'en dê qet difficil ;  
Mes ennes zo eun dra ha na rin birviqen ,  
Var guementse james ne dorrin o lezen.

### *Ar Gous.*

He bien , va mestres ,houmân zo calonad ,  
A goust eun abondancç daelou d'am daoulagad.  
Va c'halon gant glac'har a zo cazi rannet :  
Houmâ zo calonad , goude beza caret !

*Ar Plac'h.*

Allas ! va zervicher , penos ho consoli ?  
 Qer bras eo va regret ha ma zeo hoc'h hini ,  
 Qement en ho carien ha m'aljac'h va c'haret ,  
 Ar regret a zo just entrezomp partajet.

*Ar Goas.*

Coulz eo ta va mestres , prontamant qimiadi ;  
 Pa neus qet a voyen evit hor ch'onsoli ;  
 Credet am boa hepret an amzer a deuje  
 Da zitrei ho qerent da veza em c'hoste.

Gounezet em boa-y ha distroet a gren ,  
 Mes prestic goude-se e chenchont a lezen ;  
 Ne fizin qet enno , avoalc'h oc'h eus clêvet  
 Divar va fenn bemdes pa deuen d'ho quelet.

Poent e d'êc'h caout peoc'h ha din-me dimezi ,  
 Aben eiz dez amâ me vo sur anezi ;  
 Queuz ameuso quittat ; c'houi vije , ma carjac'h ,  
 Nemet var ho refus birviqen n'am hô plac'h ,

Adieu d'êc'h a laràn , adieu va esperanç ,  
 Bremâ me ranço clasq en eur plaç all va chanç ,  
 Fachet e zoun terrubl o tonet d'ho quittat ,  
 N'en deus netra d'ober vit gounit ho craç-vat ,

Roit din qent quittat eur poq da guimiada ,  
 Allas ! me gred certen e vo an diveza :  
 Calet ê deomp hon daou eur seurt cris disparti ,  
 Mancout ra va c'halon an nerz em izili.

Ret eo e nep fortun caout calz eus a gourach ;  
 Arabet eo succombi biqen evel eul lach ;  
 Finissomp gant enor vel hon eus commancet ,  
 Pa na bermet Doue e vemp-ni unisset.

Adieu d'êc'h a laràn qent eguet ho quittât ,  
 Me c'houlén evitdoc'h tri pe bêvar mennat :  
 Da guenta caout eun all en devo talanchou  
 Mui eguet n'a meus-me , ha mui eus a vadou.

Buez hir , joa , eürustet calz demeus a chanç ,  
 Yec'het , plijadurez , famill en abondanç ,  
 Graç Doue er bed-mâ da zont d'ho qenderc'hel ,  
 Er bed-all ar goude d'ar joayou eternal.

E zàn bremâ d'arguêr , adieu a lavaràn deoc'h ,  
 Birviqen n'ho quèlìn n'am bezo joa ouzoc'h ,  
 Mar permet va c'hlac'har arrêti va daelou ,  
 A ben eiz dez amàn eur plac'h all am bezo.

Pa ne allàn caouet an hini a meus c'hoant ,  
 Sur eun all am bezo hac a vezo contant ;  
 Eun nor a zer ouzìn hac eun all a zigor :  
 Ret eo goude refus repari an enor.

### *Ar Plac'h.*

Allas ! va zervicher , m'ho ped na gredit qet  
 E ven-me qiriec mar doc'h bet refuset :  
 M'am bije-me gallet , hep terri al lezen ,  
 Donet doc'h eureuji , certen en er grajen.

Qement oun glac'haret ma ouffac'h-u beza ;  
 E medi va c'halon var ar poent da ranna ;

Bras eo ar sacrifici a rân-me da Zoue.  
 Me gret e recevin ar recompanç goude.

Me garje n'am bije birviçen ho quëlet,  
 Pa ne allàn bremâ ho possedi bepret ;  
 Dre va oboissanç qer avoalc'h e paeàn  
 Va education , va antre er bed-màn.

N'ouffet petra raet , al lezen a gomand ,  
 Ne avancin james hep o c'honsantamant :  
 Brizomp bremâ souden oll nerz hor chadennou,  
 Ha renonçomp a grenn d'hon oll bromessaou.

En em separomp pront, pan'ellomp gouscoude,  
 Na chomomp qet an eil d'afflija eguile ;  
 Elec'h all ni gavo eur re d'hor c'honsoli ,  
 Rac amàn hor glac'har ne ra nemet cresqi.

Qent ma tispartiimp, m'ho ped, va zervicher,  
 Eun daou pe tri souhet ameus c'hoant da ober :  
 Eurfortungaer ha pront, furnez, madou, coantis,  
 Vertus , speret , menach , famill ha yaouanqis.

Grac Doue er bed-mâ da zont d'o qenderc'hel,  
 Hac er bed-all goude ar joayou eternal :  
 Cetu aze ar poqou ho poa-hu goulennet ,  
 Biscoas hini na rois gant muioc'h a regret.

Ma carre an dud yaouanq pere a rën er bed,  
 Cundui o yaouanqis gant enor ha respet ,  
 E vefent oll ervad e durant o bue ,  
 O caout an esperanç demeus a c'hloar Doue.

FIN.

---

 CHANSON AR BIG.
 

---

*Var eun ton ancien.*

**D**EMEZELET an autrou Tanguy  
 O devoa diou Big en o zi ;  
 Disqet o devoa d'ê parlant ,  
 Evit o divertissamant.  
 Da vourg plouyan e yent da bourmen ,  
 Da velet o amezeyen.  
 Ar Big qenta eus aneze  
 A yê eus eit ti d'eguile ,  
 Elec'h ma sante c'hoes ar c'hrampoez :  
 Hac e c'houlenne eun tamic  
 Da soulaji e c'halonic.

Allas ! dre valeur e zeo bet êt  
 Da di Janned an Avelet ,  
 Evit goulen eun tam crampoez ,  
 Dac ivez ur bannac'hic læz ;  
 Mes an tirantes-se cruel  
 El lazas gant un tol spanel.

Monstr ! da galon na fraille qet  
 Gant an druez eus e c'hlêvet

O crial divar boes he fenn :  
 Va buez din , Aveleden ;  
 M'ar doud fachet , ne deuin mui  
 Da glasq crampoez na yot da ti.

An dyrantes ne qet bet contantet  
 O veza bet ar Big lazet ;  
 Qemennet e deus da vab Grall  
 E rencje ober qement all ,  
 E rencje ober evelti  
 Da big all an Autrou Tanguy.

Yan an Ena ni a sònje  
 E voas-te fur bete neuze ;  
 Pa poa-de grêt eur belevat  
 E poa qeillet ar scudel goat ,  
 A poa-de qeillet en ti-forn :  
 Chanç vad hon eus divar da zorn.

FIN.




---

E Montroulez , e ty LÉDAN , Impr.-Librer.